


*Furlukined eo Fañch ha Jakez. Emañ Fañch
o tont, ur pezh ki gantañ a-bouezh ul lêrenn
(C'hoariet e vo perzh ar c'hi gant ur bugel...).*
Mil estlammet eo Jakez o welet anezhañ.



Jakez : O, Aotrou Fañch ! Na brav ar c'hi a zo ganeoc'h !

Fañch : Evel-just, Aotrou Jakez !

Jakez : Penaos 'ta, "evel-just" ?

Fañch : Ur c'hi-polis an hini eo !

Jakez : 'Gav deoc'h ? N'eus ket tres polis warnañ koulskoude...

Fañch : Evel-just, Jakez : er polis-kuzh emañ !

Jakez : Opala ! Kompren a ran...

Fañch : Ha speredek eo hennezh, me 'lâr deoc'h ! C'hoari 'ra ar c'hartoù ganin zoken !

Jakez : Biskoazh kemend-all ! Ha gounit a ra alies ?


Fañch : Gwech 'bet !

Jakez : Penaos 'ta ?

Fañch : Feiz, fistoulat 'ra bep taol ma tegouezh kartennoù mat gantañ ...

(Jean-Dominique Robin.)

*Emañ Loeiz o paouez dont tre
e ti Bernez, gwisket evel pa vije
en Alaska.*



Loeiz : Hopala, tomm eo er sal-mañ !

Bernez : Tomm ? Ne gav ket din e vefe ken tomm-se ! Met sell penaos out gwisket ivez !

Loeiz : Ar gwir zo ganit : ec'h an da ziwiskañ ma boned ha ma manegoù.

Bernez : Met petra zo c'hoazh dindan da vantell-c'hlav ?

Loeiz : Ma... Ur chupenn zo dindani... Sell !

Bernez : Ur chupenn ! Ha petra zo c'hoazh dindan da chupenn ?

Loeiz : Feiz, ur stammenn zo 'vat ! Sell !

Bernez : Ur chupenn, ur stammenn... Ha petra zo c'hoazh dindan da stammenn ?

Loeiz : Ur roched, 'vel-just ! Sell c'hoazh !

Bernez : 'Vel-just ! Ur chupenn, ur stammenn, ur roched... Ha petra zo c'hoazh dindan da roched ?


Loeiz : Ma... Ur vailhurenn 'ta : hag unan vrav, bet stammet din gant ma mammig. Sell mat !

Bernez : Biskoazh kemend-all ! Ha dindan da vragoù : ur c'halson... bet stammet dit gant da vammig ivez, 'michañs ?

Loeiz : Feiz ya, se zo sklaer ! Met hennezh ne ziskouezin ket dit 'at !

(Jean-Dominique Robin.)

*Emañ an daou furlukin
o tistreiñ d'ar gêr.*



Jakez : - Fañch, pedet em eus Rozenn da zont da zebriñ emberr.

Fañch : - Jakez, n'out ket mat, n'hon eus netra ken da zebriñ nemet restachoù soubenn ar fav a vefe.

Jakez : - Paouez 'ta da glemm dalc'hmat. Deuet zo ur mennozh din. Selaou mat. Mont a ri e-barzh ar gegin. Pa vo erru Rozenn e c'halvin ac'hanout da zont gant ar pladad kig lapin am eus prometet dezhi.

Fañch : - Ha pelec'h e kavin al lapin-se ?

Jakez : - Neblec'h ebet ! D'ar poent-se e ri un trouz bras gant ar c'hasteloden-noù, ha dont a ri er sal-debriñ en ur ouelañ druz hag en ur lavaret eo bet skuilhet ar pladad kig lapin ganit.

Fañch : - Te oar anezhi 'vat ! Komprenet em eus. Chom a rin er gegin. Pa erruo Rozenn, e rin trouz hag e teuin en ur lavaret n'eus ket a gig lapin ken.

Jakez : - Trouz zo. Erru Rozenn ! Staliomp an daol buan.

(Fañch a ya kuit er gegin.)

Rozenn : - Mont a ra mat ?

Jakez : - Derc'hel a ra da vont. Kae ez koazez eta !

Rozenn : - Ya skuizh-divi on, ha mall zo warnon debriñ un dra bennak. Hmm ! C'hwezh vat a zo amañ.

Jakez : - Fañch, degas ar plad mar plij...

Fañch : - Erru on.

(Trouz a glever.)

Jakez : - Petra a c'hoarvez ganit ?


Fañch (En ur ouelañ) : - Ha ! Skuilhet ganin...

Jakez : - Ar sive lapin ! Ma Doue !

Fañch : - Ket... Soubenn ar fav an hini eo.

(Strollad Ar Vro Bagan.)

Job ha Lom, lous o frioù.



Lom : - Job !

Job : - Petra zo, Lom ?

Lom : - Job, hon eontr zo marv.

Job : - Gouzout a ran. Trist, trist eo.

Lom : - C’hwi ’gav ?

Job : - O, ne gavan ket, met bravoc’h eo lavaret evel- se.

Lom : - Ya, dirak an dud, Job ... Dirazon-me, avat ...

(o kanañ) “Disul vintin ’m eus c’hoarzh
 Evit pemzek gwenneg
 O welet Yann an Druilhenn
 O klask gwerzhañ e wreg
 Evit pemzek gwenneg, Marianna
 Evit pemzek gwenneg.”

(o c’hoarzhin) - Ha ! Ha ! Ha !

Job : - Peoc’h ! Lom, ne welit ket an dud o tont en-dro eus ar pardon ? Ne vefe ket dereat c’hoarzhin ha kanañ dirazo. Peoc’h ’ta, ha kemerit un aer drist !

Lom : - Ya, diskouezomp e tougomp kañv d’hon eontr.

Job : - O, nonde ! Ne welan mui gwall sklaer : ur vrumenn zo war va daoulagad... Daoust hag emañ an noz o tont ?

Lom : - An abardaez zo o tont, Job, met an noz zo pell c’hoazh.

Job : - Ha c’hwi a wel sklaer, Lom ?

Lom : - Ya ’vat Job, ha gouzout a ran e verk an heol... d’an eur-mañ... war-dro peder eur hanter... eeun-hag-eeun.

Job : - War-dro peder eur hanter... eeun-hag-eeun ! Ne welit ket, ’m eus aon, sklaeroc’h egedon-me.

Lom : - O ! Eo !

Job : - Lavarit 'ta piv zo o tont du-se gant an hent ?

Lom : - ...Pellik emañ c'hoazh... Pa vimp tostoc'h marteze.

Job : - Alo, Lom, n'oc'h ket evit lavaret din zoken, pe ur gwaz pe ur vaouez eo ?

Lom : - O, ur vaouez eo ! Ur vaouez eo : n'eus douetañs ebet da gaout. Gwelet a ran mat-tre he c'hoef gwenn hag he brozh du.

Job : - Piv eo neuze ?

Lom : - Piv ? Piv ?

Job : - Me, me a lavaro deoc'h piv eo rak va daoulagad n'int ket ken pikouzet hag ho re.

Lom : - O ! O ! Job.

Job : - N'eus O ! O ! ebet da lavaret : Chann Vitouz an hini eo.

Lom : - Me 'lavar eo Na an Du.

Job : - Chann Vitouz eo, a lavaran deoc'h.

Lom : - Pa lavaran deoc'h eo Na an Du.

Job : - Me 'bari eo Chann.

Lom : - Me 'bari eo Na.

Job : - Chann eo.

Lom : - Na eo.

Job : - Chann !

Lom : Na !

Lom : - Na !

Job : - Me 'bari va lodenn eus hêrezh hon eontr.

Lom : - Ha me, va lodenn eus hêrezh va moereb.

Job : - Eontr ha moereb, an dra-se zo ingal, rak mard eo marv unan, an hini all zo bev.

Lom : - An eontr zo marv hag ar voereb zo klañv-bras; ha prestik e vo deomp hêrezh Karreg al Louarn, ha va lodenn a lezan ganeoc'h, ma n'eo ket honnezh Na an Du.

Job : - Du a lâran-me; ya ! Du a welit, ha netra ken.

Lom : - Me a wel du ? Me a wel du ? Me a wel sklaer, sklaer, sklaeroc'h egedoc'h Aotrou Job. Ho ! Ho !



Job : - Ho ! Ho ! Prim oc'h hiziv.

Lom : - Ya, Aotrou Job, prim on hiziv, ha skuizh on aet o selaou sotonioù an dud vezv.

Job : - Mezv hoc'h-unan, lonker brein. Ouzhpenn ur varazhad chistr hoc'h eus evet hiziv.

Lom : - Ha goude ? An dra-se a ra droug deoc'h ?

Job : - Marteze.

Lom : - Ya ! Droug a rafe deoc'h... ur... ur vuredad chistr. Me... Me... ur varrikennad ne ra ket aon din. N'eus ket er c'hanton un ever-chistr eveldon-me.

Job : - Geus ! Me a zo par deoc'h.

Lom : - C'hwi ?... C'hwi, Job ?

Job : - Ya ! me.

Lom : - C'hwi ?... C'hwi zo par din ?

Job : - Ya ! Me zo mestr deoc'h, n'eus forzh e pelec'h.

Lom : - Ha, ya, Job ?

Job : - Ya ! Ya ! Ha mil gwech ya ! Ha gwelomp.

(En em gannañ a reont ken e kouezhont en touflez.)

Job : - An neb a glask a gav.

Lom : - C'hwi 'an neb a glask; mat, kavout a reot.

(Ha kann c'hoazh.)

Job : - Me 'stanko deoc'h ho kenou, Lom gouez.

(O skeiñ gant Lom.)

Job : - Ya pe nann, krediñ a rit bremañ eo Chann ?


(Tostaet eo an hini a oa o tont : ur vuoc'h e oa !)

Ar vuoc'h : - Meu-euh !

*(Tennet eus Jakez Riou :
"An Ti Satanazet")*



*En em gavout a ra tad ur paotr
bihan gant saveteour e vab
war vord ar stêr.*



An tad : - Ola c'hwi ! Ya, c'hwi aze... C'hwi an hini eo en deus sachet ma mab er-maez eus ar stêr pa oa o veuziñ ?

Ar saveteour : - Ya, me an hini eo. Ne'm eus graet nemet ar pezh en dije graet n'eus forzh piv.

An tad : - C'hwi an hini eo neuze !

Ar saveteour : - Ya 'lavarane deoc'h : o pourmen e oa ho mab war an hent-stlej a-hed ar stêr, ha me o redek evel bep sul beure... Hag a-daol-trumm, petra am boa gwelet ? An den yaouank-se o riklañ hag o kouezhañ e-barzh an dour.

An tad : - Sklaer eo, ya : c'hwi an hini eo...

Ar saveteour : - Ya, me an hini eo ... Tizh a oa gant an dour, sapredie ! Tapet em boa krog ennañ war-bouez e vlev ha stlejet anezhañ en-dro betek ar ribl. O, ne oa ket bet aes din, a c'hallit krediñ : kig-ha-farz am boa bet da goan dec'h da noz. Erfin ! Dre forzh sikour e alan, oan deuet a-benn da saveteiñ anezhañ.

An tad : - Ya, gwelet a ran mat : c'hwi an hini eo, ha n'eo ket unan all...


Ar saveteour : - Ya avat, pa lavarane deoc'h...

An tad : - Hag e voned mezher glas a oa bet prenet n'eus ket eizhtez zo e marc'had Lannuon ? Petra ho peus graet dioutañ, hañ ? Lavarit din 'ta ! Laosket ho peus anezhañ da vont gant red an dour ! Gant ar vezh ! Sell, pak homañ war da fri da zeskiñ dit.

(Hag an tad da reiñ ur jodad d'ar saveteour.)

(Jean-Dominique Robin.)

*Emañ ar pratik
o paouez dont er stal.*



Ar pratik : - Ho tigarez, Aotrou...

Ar marc'hadour : - Petra a c'hallan ober evidoc'h, Aotrou ?

Ar pratik : - Karout a rafen prenañ un ardivink a seurt gant ar re a vez staget ouzh an dorioù evit ma serrfent o-unan...

Ar marc'hadour : - Gwelet a ran petra emaoch o klask, Aotrou : un ardivink evit emserradur an dorioù...

Ar pratik : - Dres. Unan marc'had-mat a garfen kaout.

Ar marc'hadour : - Evel-just, Aotrou : un ardivink marc'had-mat evit an dorioù da serrañ o-unan.

Ar pratik : - Ha ne vefe ket re ziaes ober gantañ ivez.

Ar marc'hadour : - Da lavaret eo e fell deoc'h kaout un ardivink simpl ha marc'had-mat evit emserradur an dorioù.

Ar pratik : - Se an hini eo... Nemet ne blijfe ket din prenañ unan a seurt gant ar re a laka an dorioù da stlapal gant kement a drouz...

Ar marc'hadour : - ...Hag un tenn kanol ! Gwelet a ran ar pezh a faot deoc'h : un ardivink aes, marc'had-mat, na vefe ket re feuls, evit an dorioù da serrañ o-unan.

Ar pratik : - Just a-walc'h... Koulskoude ne fell ket din kaout un ardivink o serrañ an dorioù ken gorrek ha...

Ar marc'hadour : - Hag e soñjfer mervel... Mat, pa lavarim mat; emaoch o klask un ardivink aes, marc'had-mat, na feuls na dinerzh evit an dorioù da serrañ o-unan.

Ar pratik : - Komprenet mat ho peus... Nemet e karfen kentoc'h kaout un ardivink na c'houllfe ket nerzh ur marc'h evit digeriñ an nor, evel ma vez e lec'hioù zo.

Ar marc'hadour : - Evel-just ! Mat ! Ar pezh oc'h deuet da brenañ zo un ardivink simpl, marc'had-mat, na re wan na re greñv, aes ober gantañ, evit an dorioù da serriñ o-unan.


Ar praktik : - Diskouezit unan din 'ta, neuze !

Ar marc'hadour : - Ho tigarez, Aotrou : ne werzhan ket ardivinkoù evit an dorioù da serriñ o-unan.

*(Troet diwar Alphonse Allais,
"Le Monsieur et le quincallier",
Éditions des Quatre Vents.)*



Da vare Nedeleg e oa. Ken skornet e oa ar stank ma c'halled kerzhout war he gorre. Ne oa nemet un toull er skorn bet graet gant Yann Gouer evit doura e loened. Chomet e oa ur sailh war vord an toull.



Lanig al Louarn : - Aotrou, deuit amañ ! Forzhik pesked zo. Ha setu amañ ur sailh. Ganti 'vo tapet un toullad anezho.

Gwilhoù ar Bleiz : - Lanig, ma c'henderv, krogit e-barzh ha stagit anezhi ouzh beg ma lost.

(Hag al louarn ha skoulmañ lost ar bleiz tro-dro da zorn ar sailh ha teurel anezhi e-barzh an dour.)

Lanig al Louarn : - Mat, ma c'henderv, bremañ e vo dav deoc'h chom e-giz-se e-pad ur pennadig betek ma vo deuet pounner ar sailh gant ar pesked.

(Mont a ra al louarn da souchañ e-kreiz ur vodenn. Tamm-ha-tamm e teu an dour da gler en-dro da lost ar bleiz.)

Gwilhoù ar Bleiz : - Kenderv, pounneroc'h-pounnerañ e teu ar sailh da vezañ gant pouez ar pesked bet tapet ganin.

Lanig al Louarn : - Gortozit ur pennadig c'hoazh, ma c'henderv. E-giz-se e vo tapet muioc'h c'hoazh.

(Emañ an deiz o tont bremañ.)

Lanig al Louarn : - Mat eo e-giz-se, ma c'henderv. Kerzhomp kuit ! Trawalc'h a besked a zo bet tapet ganeomp.

Gwilhoù ar Bleiz : - Re a besked zo... Re bounner eo ar sailhad... Ne c'hallan ober netra ken...

Lanig al Louarn : - Gwelloc'h eo un tamm bemdez evit re da Veurlarjez !

(Dres d'an ampoent emañ an aotrou o sevel. Gwelet a ra ar bleiz hag eñ ha gervel e chas.)


An aotrou : - Distagit ar chas ha bec'h dezhañ ! Harz ar bleiz ! Harz ar bleiz !

(Tostaat a ra an aotrou d'ar bleiz en ur risklañ war ar c'hler. Kemer a ra krog en e gleze hag e troc'h lost ar bleiz. Hag ar paour-kaezh ha redek kuit en ur yudal truezus.)

Gwilhoù ar Bleiz : - Louarn daonet, loen an ifern ! An dro-gamm-mañ a dalvezo dit un deiz bennak !

(Alan Hinault, diwar ur marvailh eus ar Grennamzer.)

*Yann Vruchedog, gounezet gantañ maout
ar c'hoari-sac'h, ar «gros lot» mar karit,
zo bet oc'h ober un dro-vale en Amerik.*



- Yann** : - Ha neuze, Pêr, penaos emañ an traoù er gêr ?
- Pêr** : - O, fall-kenañ, Aotrou : ho ki bihan Azor zo marv.
- Yann** : - Penaos, marv Azor ?
- Pêr** : - Ya, Aotrou, debret en doa re a gig “gagn”.
- Yann** : - Met ne oa ket dav deoc'h reiñ kemend-all a gig dezhañ ivez !
- Pêr** : - Petra a fell deoc'h, Aotrou, ne felle ket d'an dud debrin ho taou varc'h.
- Yann** : - Penaos, marv eo ma daou varc'h ivez ? Ha gant petra 'ta ?
- Pêr** : - Gant ar skuizhder, Aotrou.
- Yann** : - Perak skuizhañ anezho kement-se ivez ?
- Pêr** : - Ret-mat e oa deomp, Aotrou. Kemend-all a zour a oa da charreat.
- Yann** : - Dour, emezit-hu, d'ober petra c'hoazh ?
- Pêr** : - Feiz ! Da lazhañ an tan...
- Yann** : - Peseurt tan 'ta ?
- Pêr** : - An hini a oa kroget en ho ti, Aotrou.
- Yann** : - Em zi ? Met piv eo ar genaoueg en doa plantet an tan ennañ ?
- Pêr** : - Genaoeg ebet, Aotrou, met div c'houlouenn-goar...
- Yann** : - Div c'houlouenn-goar ?
- Pêr** : - Ya, Aotrou, an div c'houlouenn-goar a oa war elum dirak arched ho mamm, Doue d'he fardono.
- Yann** : - O lavaret petra emac'h ? Marv eo va mamm ?
- Pêr** : - Siwazh, Aotrou ! Kement a boan-galon he devoa bet o welet ho tad klañv-bras.

Yann : - Klañv ma zad ? Ha penaos emañ an traoù gantañ bremañ ?

Pêr : - Siwazh Aotrou, marv ivez, kement a boan-spered en devoa bet o klevet e oa aet hoc'h holl vadoù da goll.


Yann : - Penaos ! Rivinet on ivez ?

Pêr : - Feiz, Aotrou, ne greden ket lavaret deoc'h, met peogwir ho peus kavet hoc'h-unan, ez an da gontañ deoc'h.

*(Tennet eus "Diwar c'hoarzhin",
gant an Tad Medar.)*



*En em gavout a ra Maijan en
ur stal dilhad da brenañ loeroù.*



Maijan : - Digarezit ac'hanon, Itron... Karout a rafen kaout ur re loeroù bras.

Ar varc'hadourez : - Loeroù bras-tre ? Mat... Ez an da welet... ..Sell aze ur re loeroù glas ha roz cheuc'h- kenañ, neketa ? Ment 40; bras a-walc'h e vo, a gav deoc'h ?

Maijan : - Feiz, n'ouzon ket : ez an da glask lakaat anezhe bepred... Daonet ! Riklañ a reont diwar ma c'hofoù- gar !

Ar varc'hadourez : - Evel-just : kalz re ledan int evidoc'h !

Maijan : - Marteze a-walc'h... Met, ma lakafen anezho war gorre ma bragoù, ne riklfent ket ken, sur !

Ar varc'hadourez : - Sur a-walc'h...

Maijan : - Mat, n'ho 'peus ken nemet reiñ ur bragoù ledan din neuze... Unan bras-mat, hañ ?

Ar varc'hadourez : - Evel ma karit, Itron : c'hwi an hini eo a baeo, n'eo ket gwir?... ..Sell aze ar bragoù ledanañ a zo er stal- mañ. Kavout a ra deoc'h e vo ledan a-walc'h ?

Maijan : - Dres ar vent a oan o klask !... ..Sellit : ne rikel ket ma loeroù ken...

Ar varc'hadourez : - Gwelet mat a ran, Itron... Met gwelet a ran ivez penaos eo diskennet ar bragoù-se betek hanter ho feskennoù, resped deoc'h...

Maijan : - A gav deoc'h ?

Ar varc'hadourez : - Pa lavaran deoc'h...

Maijan : - Fidamdoue ! Emañ ar wirionez ganeoc'h... Ne vern ! Roit ur stammenn dev din : pa vo paket em bragoù, e chomo ar re-se en o sav.

Ar varc'hadourez : - Emichañs... ..Sell aze tevañ stammenn a c'hallan kinnig deoc'h... Gloan Iwerzhon eo. Ker un tammig, met ganti n'ho po ket riv, bepred !

Maijan : - Mat eo din ! Marc'had-mat a vez bepred re ger, a gustume ma mamm-gozh lavaret. ...
...Sellit : dres ar pezh am boa ezhomm : chom a ra en o sav koulz al loeroù hag ar bragoù bremañ.

Ar varc'hadourez : - Boulc'hast ! C'hwi zo unan avat ! Ne gav ket deoc'h e vije bet kenkoulz deoc'h
premañ loeroù a-vent gant ho treid ivez ?...

Maijan : - Siwazh... N'hallan ket, Itron.

Ar varc'hadourez : - N'hallit ket ?

Maijan : - Sur n'hallan ket, pa 'z eo re vras ma botoù ivez...

(Jean-Dominique Robin.)




20

b

Perak loeroù ken

*En em gavout a ra Maijan en
ur stal dilhad da brenañ loeroù.*



ARVEST KENTAÑ

**Emañ Yannig o labourat el liorzh gant e vamm.
Emañ paotr-al-lizhiri o tont.**

Ar vamm : - Sell 'ta piv ! Paotr-al-lizhiri, d'an eur-mañ ?

Yannig : - Ola 'vat ! Se ne blij ket kaer din...

Paotr-al-lizhiri : - Brav an amzer, tudoù ? Amañ emañ Yannig Pennlogod o chom ?

Yannig : - Me an hini eo...

Paotr-al-lizhiri : - Hañ ! Ha c'hwi zo martolod neuze ?

Yannig : - Feiz, ya...

Paotr-al-lizhiri : - Ma ! Setu amañ ul lizher mallus evidoc'h. Da vont diouzhtu da Vrest da lestrañ.

Yannig : - Lestrañ ? Diouzhtu ? Ola, met... Dec'h da noz e oan erruet er gêr...

Paotr-al-lizhiri : - Ma ! Evel-se emañ kont... Ale, kenavo, tudoù !

Ar vamm : - Ya, ma mab, evel-se emañ. Skuilhañ daeroù ne servijo da netra ! Ez an da gas ac'hanout betek an ti-gar.

EIL ARVEST

Emeur en ti-gar. Aze emañ ar vamm ha Yannig, e valizenn gantañ, war ar c'hae.

Yannig : - Feiz, mamm... Pa sellan ouzh an itronezed a zo amañ o c'hortoz an treñ ivez...

Ar vamm : - Ya ?

Yannig : - Ma... Gwelout a rez penaos int gwisket kran, togoù brav ha botoù koaret gante.

Ar vamm : - Ya, ha neuze ?

Yannig : - Feiz... Me a gav din, memes tra... Te n'out ket gwall faro en o c'hichen, gant da heuzoù kaoutchoug ha da davanjer lous.

Ar vamm : - Ma, petra 'ri ! O labourat e oan. Ha me zo erru kozh bremañ, ne'm eus ket ezhomm d'ober kement-se a ardoù !

Yannig : - Ya, gwir eo, mamm... N'out ket yaouank ken. Selaou. Bremañ-sonn, pa vi o vont d'ar gêr en-dro, kae eus ma ferzh da welet an apotiker, ha goulenn pilulennoù da yaouankaat digantañ.

Ar vamm : - Pilulennoù da yaouankaat ! O, ma mab, pegen speredek out !

TREDE ARVEST

Goude e veaj, emañ Yannig o c'hortoz war ar c'hae, azezet war e valizenn.

Yannig : - Setu-me en-dro ! C'hwec'h miz war vor ! Ober a ra vad en em gavout er vro adarre. Spi am eus ne vo ket pell ma mamm o tont da gerc'hat ac'hanon.

(Ur plac'h yaouank o tostaat, ur poupig ganti etre he divrec'h.)

Ar plac'h : - Ha neuze ! Ne bokez ket din ? N'anavezet ket ac'hanon ken ?

Yannig : - Dam' nann 'vat ! Piv out-te ?

Ar plac'h : - Met... Da vamm on, memes tra !

Yannig : - Ma mamm ! N'out ket sot, geo ? Ne'z peus ket ouzhpenn pemzek vloaz, sur !

Ar plac'h : - Ma ! Ne'z peus ket soñj ez poa lâret din prenañ pilulennoù da yaouankaat, c'hwec'h miz zo ?

Yannig : - Ola 'vat ! Geo, soñj am eus... Ha gwelet a ran o deus graet kalz a efed !

(Diskouez a ra ar plac'h ar poupig a zo etre he divrec'h.)


Ar plac'h : - Hag hennezh, n'anavezet ket anezhañ ivez ?

Yannig : - Feiz, nann avat ! Kennebeut all !

Ar plac'h : - Ma ! Genaoueg ! Hennezh eo da dad, hag en deus lonket ar peurrest eus ar voestad !...

(Diwar "Ar Pilulennoù", un istor kontet gant Jean Lintanf ha lakaet dre skrid gant Claude Lintanf. Embannet gant Dastum e 1992 e Komz niv. 5)





Ar medisin : - Ho tigarez, Itron, amañ eo ez eus ur paotr bihan klañv ?

An itron : - Amañ eo, Aotrou Medisin; deuit-tre mar plij. Ma mabig an hini eo a zo kaoz : sonjit 'ta ! Abaoe ar beure-mañ, ne ra ar paourkaezh paotrig nemet kouezhañ !

Ar medisin : - Kouezhañ ! ?

An itron : - Ya, Aotrou Medisin : kouezhañ a ra dibaouez !

Ar medisin : - Nag iskis eo ! Pe oad eo hennezh ?

An itron : - Pevar bloaz hanter !

Ar medisin : - Feiz ! Ha pa lakafe an Diaoul e ibil e-barzh ar jeu, e vezer gouest da chom war-sav d'an oad- se. Met, lavarit din : penaos en deus kroget an dra-se ennañ ?

An itron : - N'on ket evit kompren seurt, a lavaran deoc'h. Dec'h da noz e oa brav e stad : trotal a rae dre an ti evel ul lapin. Evit ar beure, avat, e oa un afer all : aet e oan d'e zihuniñ evel kustum, gwisket em boa e loeroù dezhañ, hag e vragoù ivez; lakaet em boa anezhañ en e sav war e zivhar, ha fadadao, setu-eñ kouezhet.

Ar medisin : - Ur gammed a-dreuz, marteze ?

An itron : - Ho, met ne oa ket echu : ha me aet d'e sevel en-dro... Fadadao ! Kouezhet ur wech c'hoazh; ha me, un tamm souezhet ac'hanon, a c'hallit krediñ, d'e sevel buan en-dro : Fadadao adarre !... Mann d'ober gantañ ! Gwelet a rit, Aotrou Medisin : n'ouzon dare petra zo kaoz, met un dra bennak a zo, sur !

Ar medisin : - Iskisat tra e gwirionez... Ha gallout a rafen gwelet ho mab, Itron ?

An itron : - Evel-just, Aotrou Medisin.

Ar medisin : - Kaerat a grouadur ! Lakait anezhañ en e sav me ho ped.

(Kouezhañ a ra ar bugel.)

- Ur wech c'hoazh, mar plij...

(Kouezhañ a ra adarre.)

- Adarre !

(Kouezhañ a ra en-dro.)

- Biskoazh kemend-all ! Digredapl ! Lavar din, ma faotrig kaezh : ha poan 'teus en un tu bennak ?

Ar bugel : - Ne'm eus ket, Aotrou Medisin.

Ar medisin : - Poan-benn moarvat ?

Ar bugel : - Ket, Aotrou...

Ar medisin : - Ha kousket mat 'teus graet en noz-mañ ?

Ar bugel : - Hag em eus, Aotrou...

Ar medisin : - Ha debret 'teus da zijuni ? Ur volennad chokolad a yafe mat ganit c'hoazh ?

Ar bugel : - O ya sur, Aotrou !

Ar medisin : - Sklaer eo : nammet-mik eo ar paourkaezh bugel-mañ !

An itron : - Nammet ! O ma Doue benniget ! O Jezuz !

Ar medisin : - Siwazh deoc'h, Itron : nodet eo e zivhar da vat ; sellit : ne sant netra ken pa vez piket...

(O tostaat ouzh ar bugel.)

- Ah ! Daonet 'vo ma ene ! O fidamdoue ! Met sellit ! Ma n'eo ket un druez gwelet an dra- se ! Petra a oac'h o kontañ din, Itron ? Nammet ?


An itron : - Met, Aotrou Medisin... C'hwi an hini eo...

Ar medisin : - Ya... Aes eo kompren ne c'hall ket ho mab chom en e sav : lakaet ho peus e zivhar e memes gar e vragoù !!!

*(Troet diwar Courteline,
"Coco et Toto", Flammarion.)*



*Seizennet eo penn mamm-gozh
ken na weler ken nemet ul lagad.
Kouezhet eo diwar varc'h...*



Ar bugel : - Feiz, mamm-gozh, ur penn drol hoc'h eus gant ar seizenn-se : gwelet a rit ar pezh a c'hoarvez pa ne vezer ket fur !

Ar vamm-gozh : - N'eo ket ken grevus-se, memes tra... Kouezhet on diwar varc'h, sell aze tout. Warc'hoazh avat, e savin diwar ma gwele en-dro.

Ar bugel : - Met petra 'oa peg ennoc'h ivez ? Mont da bourmen war varc'h hep bezañ bet o klask deskiñ a-raok zoken !

Ar vamm-gozh : - Na petra 'ta c'hoazh ! Ne'm eus ket amzer da goll o treiñ-distreiñ en ur sirk gant marmouzed eveldout !

Ar bugel : - Evel-se e vez graet gant an holl, koulskoude... Nemet ganeoc'h-c'hwí evel-just ! Ha tokarn ebet war ho penn ouzhpenn-se!

Ar vamm-gozh : - Un tokarn ! Daonet 'vo kroc'hen va ene ! N'eus netra viloc'h evit un tokarn marc'heger... Ne gav ket dit ez eo ma zogig tirolian kant gwech kranoc'h, gant e bluennoù fezan ha kegin ?


Ar bugel : - Marteze a-walc'h... met n'en deus ket an togig-se miret ouzhoc'h da derriñ ho penn, bepred !

Ar vamm-gozh : - Ro peoc'h ! Ne glevi seurt diganin diwar an afer-se ken : warc'hoazh e werzhin ar marc'h-se da brenañ ur marc'h-tan !

Ar bugel : - O ma Doue benniget ! N'eo ket furaat an hini a rit, mamm-gozh : gwashaat an hini eo, ya sur, ha n'eo ket marteze !

(Jean-Dominique Robin.)

Naon du en deus Lanig al Louarn. Bet eo o rodal an devezh-pad o klask war-lerc'h ur preizh met n'en deus ket tapet an disterañ logodennig. Ha setu-eñ e ti Gwilhoù ar Bleiz.



Lanig al Louarn : - Nag ur frond plijus ! Dav eo din mont e-barzh, da c'houzout petra 'zo kaoz anezhañ.

(Skeiñ a ra al louarn ouzh an nor da c'houlenn digor.)

Lanig al Louarn (hegarat-tre) : - Gwilhoù, ma c'henderv, tri devezh zo bremañ ne'm eus debret tamm. Deuet on da c'houlenn un tamm boued diganeoc'h.

(Teir morzhed-hoc'h a zo a-istribilh ouzh an treustoù.)

Lanig al Louarn : - Setu aze teir morzhed-hoc'h a-feson ! Ul lip-e-bav e tle bezañ ! Plijout a rafe din kaout un tañva anezho !

Gwilhoù ar Bleiz : - N'ho po ket !

Lanig al Louarn : - Un tammig bihan hepken...

Gwilhoù ar Bleiz : - N'ho po ket ! N'ho po ket ! M'ho peus naon e vo dav deoc'h debriñ traoù all.

(O komz d'e wreg) : - Roit ur skudellad soubenn da Lanig 'ta !

(Hag al louarn da zebriñ e soubenn, dipitet un tamm anezhañ. Ur wech echu e soubenn gantañ e sell ouzh ar morzhedoù.)

Lanig al Louarn : - Ma vefen en ho plas, ne laoskfen ket ar re-mañ el-lec'h m'emaint !

Gwilhoù ar Bleiz : - Ha perak 'ta ?

Lanig al Louarn : - Me a soñj din n'int ket kuzhet mat a-walc'h.

Gwilhoù ar Bleiz : - N'eus ket ezhomm d'o c'huzhat.

Lanig al Louarn : - N'ho peus ket aon e vefent laeret diganeoc'h ?

Gwilhoù ar Bleiz : - Laerezh ma morzhedoù-moc'h diganin-me ? Piv eo an istrogell a gredfe hen ober 'ta ?

Lanig al Louarn : - Piv a oar ? Ma vefent din e kuzhfen anezho hag ez afen da embann ez int bet laeret diganin. E-giz-se ne vefe den ebet ken evit klask o laerezh.

Gwilhoù ar Bleiz : - N'eo ket dav ober e-giz ma lârit. Staget mat int el lec'h m'emaint hag aze e chomint ! N'eus riskl ebet. Kenavo, ni zo 'vont da gousket bremañ.

Lanig al Louarn (a vouezh izel) : - Dav eo din mont e-barzh, kousto pe gousto ! Ez an d'ober un toull er voger ! E-giz-se e c'hallin tapout krog e-barzh an tammoù kig-se !

(Mont a ra al louarn e-barzh an ti; hep ober trouz e laka e grabanoù war ar morzhedoù-hoc'h. Dihuniñ a ra Gwilhoù gant trouz al louarn o vont kuit.)

Gwilhoù ar Bleiz (en ur glemmichal) : - Laeret eo bet ma morzhedoù-hoc'h diganin !!!

Lanig al Louarn : - Ne gredan ket ac'hanoc'h. Laeret int bet diganeoc'h, emezit-hu, met e gwirionez, e kredfen kentoc'h int bet kuzhet ganeoc'h.

Gwilhoù ar Bleiz : - N'eo ket gwir, n'eo ket gwir, tamm ebet ! Hen touiñ a ran !

Lanig al Louarn (en ur vousec'hoarzhin) : - Paourkaezh Gwilhoù hag en deus kollet e vorzhedoù-hoc'h !

Gwreg ar Bleiz (droug enni) : - Ma teuan a-benn da c'houzout piv eo al loen vil en deus laeret hon zammig boued diganeomp... Mallozh ruz dezhañ. Ra 'vo daonet !!


Lanig al Louarn (evitañ e-unan) : - Furoc'h e vefe din mont kuit ! (d'ar re all) : - Ma... Poent bras eo din mont... Emañ ma gwreg ouzh ma gortoz gant ma merenn... Ken an deizioù neuze !

(Hag al louarn da vont kuit ar buanañ ma c'hall.)

(Marvailh eus ar Grennamzer.)



*Daou foeter-hent, Tin Vras ha Laou an Togn,
a zo o vale kêr, nec'het gant ar berr-arc'hant
ha gwasket gant an naon du.*



ARVEST KENTAÑ

Tin : - Brav eo bale d'an hini eo leun e gof, met bale gant ur c'hof goullou...

Laou : - Ha c'hoazh, ma ouifemp da belec'h emamp o vont ?

Tin : - Keuz am eus da di ma mamm : bara-mel ha chokolad war an daol ingal !

Laou : - Marc'h war ar boued e oan-me !

Tin : - Laou, c'hwezh kig rostet a zeu betek ma fri.

Laou : - Eus an ostaleri-se emañ o tont, sur !

Tin : - Deomp e-barzh da zebrin.

Laou : - Arc'hant zo ganit ?

Tin : - Pegoulz e vo paeet ? A-raok pe goude ?

Laou : - Goude, evel-just. Biskoazh ne'm eus klevet e vefe goulennet arc'hant a-raok, nemet gant ar vugale e vefe.

Tin : - Deomp tre, neuze.

Laou : - Kerzh a-raok. Me a lakaio ma zreid war seulioù da votoù, Tin.

An ostiz : - Deuit tre tudoù ! Petra ho po ?

Tin : - Traoù war an daol !

An ostiz : - Taolit ho pouez mar plij !

Laou : - Petra zo ganeoc'h war an tan ?

An ostiz : - Ur pemoc'h bihan tener emeur o rostañ.

Tin : - Me a garfe kaout ur pladad vioù fritet ouzhpenn- se.

Laou : - Hag ur c'hilhog lart da heul ar pladad soubenn.

Tin : - Hag un tamm fourmaj-laezh a-raok ar frouezh.

An ostiz : - Hopala, paotred, c’hwi zo kreñv war ar boued ! Mil boan ho pezo sevel diouzh taol ’m eus aon !

Tin : - Kemend-all a zebromp div wezh bemdez.

An ostiz : - Graet e vo deoc’h, hervez ho c’hoant. Evit ar priz ne c’hallan ket lavaret c’hoazh.

Laou : - Ne reomp ket forzh gant ar priz.

An ostiz : - Mont a ran da zispluñviñ ar yarig. Petra ’vo degaset deoc’h da evañ da c’hortoz ?

Tin : - Gwin ruz, eus ar gwellañ !

EIL ARVEST

Goude ar pred.

Tin : - Dreist eo bet an traoù en ti-mañ. Ma gwalc’h am eus bet. Dont a rin en-dro evit ar memes priz.

Laou : - Evit ar memes priz ! A, Yaou ! N’eus gwenneg ebet ganeomp.

Tin : - Kasomp ar peurrest d’an traoñ bepred a-raok mont d’an toull.

Laou : - Yec’hed mat dit.

Tin : - Ha taolioù-botoù er penn a-dreñv ma n’eo ket fest-ar-vazh !

Laou : - Kavet em eus an tu da vont kuit.

Tin : - Lavar din buan buan ’ta.

Laou : - Deus tostoc’h, ma vo silet an doare e pleg da skouarn.

Tin : - Komprenet em eus.

Laou : - Ostiz, deuit amañ, ’m eus aon eo arru poent deomp paeañ.

An ostiz : - Setu ho kont, Aotrounez.

Tin : - Roit anezhi din. Din eo da baeañ.

Laou : - Ha ! n’eo ket, ma zro eo. Me an hini eo a baeo.

Tin : - Ostiz, ma kemerit arc’hant digant an den-mañ, e vo bec’h en ti, me a lavar deoc’h !

Laou : - Roit an tamm paper-mañ din.


Tin : - Ta,ta,ta,ta ! Pegement eo ?

An ostiz : - Tri skoed warn-ugent.

Laou : - Ni zo kamaladed kozh, n’omp ket ? Din eo da baeañ eta !

An ostiz : - Perak ne rannit ket an dispign etre daou ?

Laou : - Etre daou : biskoazh kemend-all !



Tin : - Setu ar pezh a vo graet. C'hwi, ostiz, a voucho ho taoulagad hag a glasko pakañ unan diouzhimp. An hini a vo paket a baeo.

An ostiz : - Mouchig-dall a vez graet eus ar c'hoari-se, neketa ?

Laou : - Setu, skoulmit ar mouchouer-mañ tro-dro d'ho penn.

An ostiz : - Ne welan tra ebet ken. Prest oc'h ?

Tin : - Evit bezañ prest ez omp prest avat ! Deoc'h da glask !

Laou : - Er-maez, ha d'an daoulamm ruz !

An ostiz : - Pelec'h emaint ? Trouz ebet ken.

(Lemel a ra ar mouchouer.)

- Penaos ! Den ebet ! Digor-bras ar prenestr ! Harz al laer ! Harz al laer !

*(Tennet eus Istorioù Jakez Kroc'hen,
gant Pêr-Jakez Helias.)*




25

b

Piv a baeo ?

*Deuet eo an aotrou Storlok da gavout
ar C'homiser gant un eurier bet kavet
gantañ war vord an hent.*



Ao. Storlok : - Aotrou Komiser ?

Ar C'homiser : - Ya ? Petra zo ?

Ao. Storlok : - Ezhomm 'm eus da welet ac'hanoc'h, Aotrou Komiser.

Ar C'homiser : - Grit buan neuze !

Ao. Storlok : - Ne vin ket pell.

Ar C'homiser : - Mat, deuit tre neuze.

Ao. Storlok : - Setu, Aotrou Komiser : Deuet on da zegas deoc'h un eurier am eus kavet en noz-mañ e korn Straed an Ti-Kêr ha Plasenn ar Marc'had.

Ar C'homiser : - Un eurier ?

Ao. Storlok : - Ya, un eurier, Aotrou Komiser. Sellit...

Ar C'homiser : - Diskouezit din 'ta ! Ya, un eurier eo.

Ao. Storlok : - Evel-just...

Ar C'homiser : - Trugarez deoc'h !

Ao. Storlok : - Daoust hag-eñ e c'hallan mont kuit bremañ, Aotrou Komiser ?

Ar C'homiser : - Ne rit ket ! Pas ken buan-se, mar plij...

Ao. Storlok : - Pres zo warnon !

Ar C'homiser : - N'eus forzh !

Ao. Storlok : - Tud zo o c'hortoz ac'hanon...

Ar C'homiser : - Ret mat 'vo deoc'h gortoz koulskoude.

Ao. Storlok : - A !

Ar C'homiser : - Ya !

Ao. Storlok : - Met...

Ar C'homiser : - Trawalc'h ! ... Gortozit... Ne gave ket deoc'h, memes tra, em bije degemeret an eurier-mañ hep klask gouzout penaos emañ degouezhet ganeoc'h.

Ao. Storlok : - Met... Lâret 'm eus deoc'h : kavet 'm eus anezhañ e korn Straed an Ti-Kêr ha Plasenn ar Marc'had.

Ar C'homiser : - Ho komprenet mat am eus ! Met... Pelec'h ?

Ao. Storlok : - Pelec'h ? War an douar !

Ar C'homiser : - War riblenn ar straed ?

Ao. Storlok : - War ar riblenn ! Pa lavaran deoc'h !

Ar C'homiser : - Sed aze un dra dreistordinal ! Ar riblenn n'eo ket ul lec'h da leuskel un eurier warni, ne gav ket din bepred.

Ao. Storlok : - Salokras, Aotrou Komiser, met...

Ar C'homiser : - Met petra c'hoazh ? Me 'soñj din ez anavezan a-walc'h ma micher ! Ha n'eo ket alioù a c'houlennan diganeoc'h, hoc'h anv ne lâran ket !

Ao. Storlok : - Storlok eo ma anv. Yann-Eozen Storlok. Ganet e Lokplougerlann, d'an 29 a viz Du 1861. Yann Bêr Jakez Erwan Eflamm Gwilhom Fulup Storlok a oa ma zad, ha Barba Koupaia Kelieneg ma mamm.

Ar C'homiser : - Ho chomlec'h, mar plij ?

Ao. Storlok : - Hent-dall Didrouz, niverenn 7.

Ar C'homiser : - Ha diwar betra e vevit ?

Ao. Storlok : - Douaroù 'm eus e Bro-Leon, kant buoc'h-laezh e Bro-Dreger, div vag-pesketa e Bro ar Vigoudenned hag ur stal-anduilh er Gemene !

Ar C'homiser : - Da bet eur ho poa kavet an eurier-se ?

Ao. Storlok : - Da deir eur eus ar beure, Aotrou Komiser.

Ar C'homiser : - Ken abred-se ?

Ao. Storlok : - Ya 'vat !


Ar C'homiser : - 'M eus aon ho peus ur vuhez gwall ziroll.

Ao. Storlok : - Ma buhez ne sell ket ouzhoc'h !

Ar C'homiser : - Marteze a-walc'h... Met droed 'm eus da c'houlenn diganeoc'h petra 'oac'h oc'h ober, da deir eur eus ar beure, e korn Straed an Ti-Kêr ha Plasenn ar Marc'had, c'hwi hag a zo sañset bezañ o chom Hent-dall Didrouz !

Ao. Storlok : - Penaos "sañset" ?

Ar C'homiser : - Ya, sañset !



Ao. Storlok : - Ar wirionez eo !

Ar C'homiser : - Setu ar pezh a vo da brouiñ. Met bremañ, mar plij, bezit seven ha respontit d'ar goulennoù a rankan ober ouzhoc'h. Goulennet 'm eus diganeoc'h petra 'oac'h oc'h ober, e-kreiz an noz, en ur c'harter ha n'eo ket ho hini.

Ao. Storlok : - N'eo ket hoc'h afer !

Ar C'homiser : - Din-me eo e lârit an dra-se ?

Ao. Storlok : - Da'm soñj, ya.

Ar C'homiser : - Ola, ola, ma zamm aotrou ! Gwell e vefe deoc'h sioulaat. Komz a rit war un ton na blij ket din tamm ebet. Hag ho penn, pa sellan mat...

Ao. Storlok : - Ya ?

Ar C'homiser : - Ya, dont a ra din bremañ... N'oc'h ket bet kondaonet biskoazh ?

Ao. Storlok : - Na c'hwi ?

Ar C'homiser : - Pezh divergont !

Ao. Storlok : - Na c'hwi, paourkaezh den !

Ar C'homiser : - Mont a rit re bell ganti.

Ao. Storlok : - Ha c'hwi zo oc'h ober goap ouzhin. Kavout a ra deoc'h e vije tres ul laer warnon ? Gant ho koulennoù ! Biskoazh kemend-all ! Kavet 'm eus un eurier, deuet on betek amañ d'e zegas deoc'h, ha setu penaos on degemeret ! N'eo ket brav d'an nen bezañ onest, avat.

Ar C'homiser : - A ! Evel-se emañ ! Gortozit, ma faotr ! Ez an da zeskiñ deoc'h penaos e vez komzet ouzh ur c'homiser ! Sellit ouzh an den divergont-se ! Met piv oc'h-c'hwi 'ta ? Daoust hag anavezout a ran me ac'hanoc'h ? Storlok ? Hent-dall Didrouz ? Met piv 'oar ? Ma ! N'eo ket diaes, gwelet 'vo !

(Hag eñ ha redek da zigeriñ an nor.)

Ar C'homiser : - Pakit al lapous-se ! Hag en toull, diouzhtu !

Ao. Storlok : - Penaos ? Biskoazh kemend-all !

Ar poliser : - Setu, en toull ! Ha peoc'h bremañ !

Ao. Storlok : - Fidamdoull ! Kentañ gwech e kavin un eurier...

*(Troet diwar Courteline,
Le Commissaire est bon enfant, Flammarion.)*

